

CHANSON

VAR SUJET AN AUDIVI.

Var ton : *Ar guischou nevez.*

Prestet din va mignonet
Ho silanç ac o patientet
A me a gano deoc'h eur chanson
Var meuleudiou ar boesson.

Er scritur pehini am beus lennet
Ar madouberryou a vo recompanset
Nan nem beus quet cavet netra
Quen caer 'evel carret on nessa.

Doue a ro quen allies a vennat
Evel a so sur a verennat,
Evit eur verennat dour scler -
Recompans so digant or Salver.

Pa so quen allies a vennat
Evel a so a verennat
Gras ma continuo ar bloas,
Evel denieus an deis quenta.

Da de quenta deus ar bloas nevez
E vellan ebais e pep contre
E ma prout an dut gant ar poccou
Evel ma sint gant ar chopinadou.

An deiz-se, e maint epad an de
An eil o vriata eguile
Eur blaves mat a zesiran dec'h
Ac effomp on daou pep a vannech.

Ne deus quet a gas a gredan
Piou a beo da guentan
Or banac'hou ni a dra certen,
Ne chomint quet er variquen.

Ar gouer a yel en dro dioc'h ar mintin
A goude creis de e zaï ar chopin ;
Sul vui e vo ar vouellen glebyet,
Sul vui e fallo dei besa goualc'het.

Dre ar vertu en deus ar guin-ardant
Ema nourgouil a puissant,
Magicianet a corceryen
E maint tout dre vertu ar verren.

Adres na ners ne vanq de
D'ober ar pes o deus bolantez
Carguet int a superstitionnou
Assur int var an debauchou.

Gouestli ousont a trei an tamoues
A santout eus cun divineries,
Meur a zen ma no c'hlefe a c'hrête
In desse en tamic aoun raoe.

En minous fal ac en trist trist
Dre vertus eur chopinat chist,
Mar de quement ac eur hornandon
E tougo ners, a gallout Samson.

Biannic on me da vellet
Mes cals a dut am beus tromplet
Nan nem 'ns quet aoun rac eur c'hristen
Mar ema dre vertu e honañ.

Eur paour ques coz, crena a ra e hizili,
Dre vertu eur banne audivi
A lavaro amser am eus me bet
Me ne gaven quet par ebet.

A c'hoas em heus c'hoant da lavaret,
Ma ve malis ennou laqueat
Ne gredan quet eve en lima
An hini a spounsen a razan.

O tud yaouanc caquetaeryen
Goapereset a godiseryen
A bars clevet ar viryones guenec'h
Ema ret eo pean eur bannac'h.

Dre ar vertu eus ar guin-ardant
E tiscleryont o santimant,
Pa savo ar banne-se enn ho pen
E leveret ar virionez pen da ben.

Goechal, pa voan me den yaouanc
Me am boa choaset eur vestres coant
Tri blos van bet oc'h e darempredi
Ep clevet coms vad ebet ganti.

An de quenta d'ens ar bloas nevez
Me yeas da ober eur bale
Ac e racontris va mestres
Carguet eus a tristidiguez.

Eur soueti dei eur blavez mad
Goulen outi a me a voa de grad
Aben pa on bo effet pep a vannez
Ni a gomzo eus ar briadelez.

Hi ractal eb differi
A dont gannen dan hostiliri.
A ben ma oan sortiet
Man diousign ne devoa caset.

Mil bennos doue ebars en tima
Ac er boisson e chom enna
Pa en deus great dign clevet libramant
Santimant, va flac'h yaouanq.

Houac'h mis goude ma van demezet
Ma greq ousign a oue fachet
Quen coz, quen cruel esaç
Ne garfac'h quet beza em plaç.

Ar myua tra am honsole
Tostat a ra dar bloas nevez
En deis me glevo gatti
E pe bis ema drein desi.

An de quenta eus ar bloas
Eur potat guin-ardant am boa
A me a commans de abusi
Ac hi commans da boquet dign.

Trincomp trincomp trincomp presant
Trincomp on daou d'ar guin-ardant
Pebes seurt presant e ouma
Digasset gant Done er bet ma.

Ar seheth a seu hoas dam supren,
Hastomp creguy en eur goueren,
Do yehet eta ma fried
Me gleo va goueren o lavaret.

Ma vent joa ar priejou
Rejouisa a ra or halonnou,
Ober ra den triuguent vloas
Sevel quen soun en ne sa.

Da ober ar bal ac eur hontredanz,
Gant enor a gant peb reveranz
Va halonnic a so quen humen,
Pa effan nem bez jamais droue dioc'h den.

An ol em c'halon a garran,
A c'hui va fried paour da guenta.
Setu meleudiou ar guin-ardant
Util evit an ol, coz a yaouancq.

Disquet a nei a canet-hi
A criet vive ar l'audivi
Ma vige me bet eur bloas présent
Tensoryer var ar guin-ardant.

He hallac'h sur va mignonet
Donnet daou a daou dam gouelet
Me n'em beus netra en tensor.
Nemet va·rim a va memor.

Etre Quimperle a Lannuon
Me meus rimet meur a chanson
Mes ouma so great e ber amzer
En eur dreuzi ar guear euz a Guemper.

Piou eo eta an den so bet quenn hardi.
Dober eur son dan audivi,
En ar hrea tra so tout er bet ma,
Ar botret vad o deus lampou diganta.

Pierre ar Yan deuz a Dreguer
Ennes ebet ar c'homposer
Natif a bares Plouerin,
E chom et Quemper-Corentin.

FIN.